

## D'an 21 a viz Mezheven

- War-dro 406, **sant Alban Mainz**, merzher.

Ganet e 360 en ezezenn Naxos e Bro-C'hres, en em ginnigas da sant Ambroaz Milano er c'hasas da C'halia evel beleg kiminiat karget da stourm enep dalc'hidi an disivoud ariat a nac'he doueelezh ar C'hrist hag a oa bet kondaonet gant Senez Nikaia e 325. E 406, e voe redet gant an disivouderion betek Mainz e Bro-Alamagn lec'h ma voe dibennet ganto.

- E 718, **sant Leufrez** (Leufroy e galleg), abad en eskobiezh Mediolan (Evreux) er Neustria. Diazezañ a reas ur manati dindan anvadur ar Groaz-Santel hag an Ebestel, hiziv La-Croix-Saint-Leufroy, a renas e-kerzh 48 bloaz.

- E 866, **sant Raoul pe Rodolf** (Gl. Rodolphe, Radulphe, Rudolphe), eskob Avaricon (Bourges) a savas evit e gloer un *Ensavadur Pastorel*, ennañ setañsoù an Tadoù ha kanonoù senezel.

- E 1581, e Roma, **sant Loeiz Gonzaga**, jezuist, Patrom ar yaouankizoù kristen ez eo. O nac'h sevel war dron Mantova ez eas tre e Keneilez Jezuz e-lec'h m'en em droas e ziantegezh hag e demz-spered nerzhus en ur garitez evezhiek ha kizidik. D'e dri bloaz warn-ugent e varvas o prederiañ un den bosennek en un doare kalonek dreist.

- E Breizh, e 617, **sant Meven**, abad diazezour abati Sant-Yann e Gwazel, e rouantelezh Devnon (diwezhatoc'h eskopti Sant-Mac'hloù). Ganet eo war-dro 520 e Ork, e kontelezh Gwent e Kembre eus santez Tunvell c'hoar sant Iduned. Eno e reas e studioù. Diskibl da sant Samzun, ez eas d'e heul d'an Arvorig war-dro 545 hag e voe gantañ en abati Dol. Diwezhatoc'h e voe karget da ziazezañ ur manati e diabarzh ar vro: abati Gwazel, lec'h ma voe desavet gantañ sant Yuzhikael.

- E Breizh, er V<sup>vet</sup> kantved, **sant Riagad**, abad hag eskob en Iwerzhon, deuet da vezañ penitiour e Breizh.

- E Breizh, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Marc'han**, abad. Ganet e Kembre e vefe diskibl sant Brieg. Lezet en deus e anv da barrez Sant-Marc'han e Bro-Zol, ha marteze ivez da hini Sant-Malgan, en eskopti Sant-Mac'hloù.

- En Iwerzhon, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Cormac Ó Liathain**, abad, diskibl sant Koulmkell.

## D'an 22 a viz Mezheven

- E 94, e Roma, merzherenti **sant Flavius Klemez**.

Barnet e voe d'ar marv war intrudu an impalaer Domitianus, e genderv, dindan gehuz andoueouriezh dre ma azeule ar C'hrist nemetken.

- Da vare an impalaer Adrianus pe kentoc'h Antonin war-dro 140, en Armenia, **Dek mil merzher menez Ararat** bet kroastaget, anezho soudarded gonezet d'ar feiz, en o fenn **sant Akaz** a vez kontet e-touez ar 14 sant skaozeller.

Kehelet e vezont en iliz Kraozon lec'h ma weler ur stern aoter o tiskouez o merzherenti.

- E 431, **sant Paolin Nola**, eskob Nola en Italia, barzh latinek. Mignon e oa d'ar sent Varzhin, Ambroaz, Eosten, Sulpis Sever, Aman Roazhon, d'an impalaer Teodoz, d'ar pab Anastaz. Miret eo bet barzhonegoù ha lizhiri ma ra anezhañ unan eus ar wellañ barzhed kristen latin.

Ganet e Bourdel e 353 diwar un tiegezh senedourion roman eus ar re binvidikañ en em gavas Meropius Pontius Paulinus gouarnour rannbarzh Campania d'e bemp bloaz warn-ugent. Dimeziñ a reas gant ur gristenez spagnolat anvet Tereza a c'hanas ur bugel a golljont ur sizhunvezh goude e c'hanedigezh. Diwar-se en em droas Paolin davet ar feiz kristen. Badezet e voe e 390 ha beleget e 394. Gant e wreg e tivizas pleustriñ alioù an Aviel. Gwerzhañ a rejont e gounid ar beorion o domanioù e Spagn, e Galia, hag en Italia evit ober o annez e Nola e kichen bez sant Felis. Eno e savjont ur brientiliz meurdeus hag un ospital evit ar biric'hirined hag ur gouent. E 409 en em lezas da vezañ anvet eskob Nola hag e veilhas gant evezh war e feizidi gwallhejet gant aloubadegoù ar c'hGoted goude dizalbad Roma.

- E 1272, **ar gwenvidig Inosant III**, pab eus Urzh ar Brezegennerion.

Goude bezañ kelennet an doueoniezh e Pariz e voe anvet, en desped dezhañ, eskob Lyon lec'h ma voe habaskaer war un dro gant sant Bonaventura er senez a bledas gant an unaniezh etre al Latined hag ar C'hresianed. Diuzet da bab e varvas pemp miz goude.

- E 1535, **ar sent John Ficher**, eskob Rochester, ha **Tomaz Mor**, tad a diegezh, kañseller roue Bro-Saoz, merzheriet o daou e Lundin (London) dre ma enebjont ouzh ar roue Herri VIII a-zivout e dorr-dimeziñ ha dreistbeli speredel ar pab.

Hag int henlennegerion, mignoned Erasmus hag Holbein, e lakjont o c'halonegezh laouen, lemmded o speredoù ha lealded o emskiantoù e servij enor ar gurunenn hag unvaniezh an Iliz, betek skuilhañ o gwad.

- En Enezenn-Vreizh, war-dro 303, **sant Alban**, kentañ merzher ar Vretoned.

Ganet eo e dibenn an III<sup>de</sup> kantved e Verulam, e-kichen Lundin (London), en un tiegezh gouvriaded pagan. Da vare an heskinadegoù roman, ne oa ket badezet c'hoazh pa wiskas dilhad ar beleg sant Amfibal evit bezañ harzet en e-lec'h ha lakaet d'ar marv.

- E Breizh, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Aaran**, penitiour war enezenn Sezambr (Canalchius), e-tal da Aled. Degemeret e voe gantañ sant Brendan ha sant Mac'hloù hag o bagad menec'h o tont eus manati Lankarvan.

- Er VII<sup>vet</sup> kantved, nepell diouzh Sant-Kalez (Saint-Calais) er Maen (Maine) e Neustria, **santez Zerod**, penitiourez, keneilez santez Ozvan.

- En Iwerzhon, e 964, **sant Kronvael**, manac'h e Clúain Ioráird, marvet beuzet.

- Er VII<sup>vet</sup> kantved, **Sz Zerod** (Gl. Cérotte), penitourez, keneilez santez Ozvan.

## D'an 23 a viz Mezheven

- War-dro 256, e Roma, merzherenti **santez Paola**, gant he c'heneilezed **ar sent Agripina, Bassa hag Agathonika**.

- Er IV<sup>re</sup> kantved, da vare Diocletianus, **Merzherion Santel Nikomedia e Bitinia**, kristenion niverus a zegemeras ar verzhereinti gant kalonegezh goude bezañ klasket repu er menezioù hag er grec'hier.

- E 679, e Bro-Saoz, **santez Eldrud pe Ediltrud**, abadez, merc'h da roue Norzombria, a ziazezas un abati war enez Eli. Patromez iliz parrez Trelez e Bro Leon lec'h ma vez anavezet dindan anv *Gwentrog*, moarvat e lec'h ur santez dianav eus Breizh.

- E Breizh, e 895, merzherenti **sant Bili**, eskob Gwened bet lazhet gant an Normaned e Plaodren e-kichen Gregam lec'h m'en doa savet ur minic'hi.
- En Iwerzhon, er <sup>V<sup>vet</sup></sup> kantved, **sant Mochaoui**, penitiour ha da c'houde abad.

### **D'ar 24 a viz Mezheven**

- **Gouel Ginivelezh sant Yann Vadezour.** C'hwec'h miz a-raok Nedeleg, gouel kumun gant an ilizoù bizantat, a veze lidet endeo da vare sant Eosten.  
Yann, bugel ar c'hrataenn, deuet goude hir amzer, a lammas e kof e vamm Elizabed pa voe gweladennet gant he c'heniterv Mari, hag e c'hanedigezh a gemennas hini ar C'hrist Jezuz a c'hoarvezas c'hwec'h miz goude e hini. Douget gant al levez, e kanas e dad Zakaria ar *Benedictus* o reiñ meuleudi da fealded Doue hag o tiouganañ war c'halvedigezh an Diaraoger. Skediñ a reas kement ar rad ennañ ma tisklerias ar Salver e-unan diwar e benn "*ne oa savet e-touez mibion ar vaouez brasoc'h den eget Yann-Vadezour.*" (Lk 7,28)
- E 843, merzherenti **sant Konarzh**, eskob Naoned a vez lidet d'ar 25.
- E Breizh, **sant Tudel**, penitiour e Maoron.
- E Kembre, e 660, ganedigezh en neñvoù **santez Gwenfred** pe Gwenvrewi, abadez ha merzherez. Ganet e Flintshire, e oa merc'h Trevith (pe Tyfid), kuzulier roue Kembreiz.  
Desavet er feiz hag aliet gant he eontr sant Beuno e vennas en em ouestlañ d'ar C'hrist er werc'hted. C'hoantaet e voe avat gant an tiern Karadog eus Hawarden. O tennañ e vad eus ezveziadur he zud e teuas d'he c'haout en he zi. Homañ a dec'has betek an iliz lec'h m'edo he zud hag e voe tizhet gant Karadog dallet gant ar fulor he dibennas raktal. Beuno a dostaas he fenn diouzh he c'horf hag e teuas en-dro d'ar vuhez. Ur feunteun a strinkas lec'h ma oa kouezhet he fenn. Goude marv sant Beuno e wiskas ar ouel en ur manati diazezet gant he zad hag e savas hi d'he zro manati Gwytherin en Denbighshire.
- E Kernev-Veur, **santez Sennin pe Sennan**, leanez.
- E Kernev-Veur, **sant Germog**, tiern.
- E 775, merzherenti **sant Revael**, Iwerzhonad, eskob Mechelen e Flandrez.  
Mont a reas da birc'hrinañ da Roma lec'h ma voe eskobet ha kaset davet broioù an hanternoz, eno e kenlabouras gant sant Wilibrord pergen er Brabant. Lazhet e voe gant tud m'en doa klasket reizhañ o buhezegezh.

### **D'ar 25 a viz Mezheven**

- E 291 pe 303, e Breizh-Veur, merzherenti **sant Amfibal**, beleg misioner a gemennas ar feiz da sant Alban hag a voe kelenner sant Sokratez ha sant Stevan.
- War-dro 463, **sant Prosper Akwitania**, manac'h e Marsilha ha da c'houde e Roma, doue-oniour.  
Goude bezañ studiet a-zoare al lennegezh hag ar brederouriezh e renas gant e wreg ur vuhez eeun ha kuzh. Deuet da vezañ manac'h e Marsilha e tifennas enep dalc'hidi kredennoù Pelaj kelennadurezh sant Eosten hag e voe sekretour ar pab sant Leon Veur.

- E Breizh, **sant Alar**, Patrom ar c'hezeg.

N'ouzer netra diwar e benn : moarvat ez eo ur sant eus ar c'hantvedoù kentañ en doa kristenaet gouloc'hioù pagan (an dour, an tan, ar c'hezeg) a gaver stag ouzh e gehelerezh, mesket ma'z eo bet diwezhatoc'h gant sant Eloa.

- E 725, merzherenti **sant Emilian pe Milan** (Lt. Emilianus, Gl. Emilien), eskob Naoned, aet da benitiour e-kichen Augustodunum - hiziv Autun - lec'h ma varvas en ur argad gant Sarazined.

- E 843, **sant Konarzh**<sup>1</sup>, eskob Naoned ha merzher, "*Tad Naonediz ha merzher*", lazhet e-ser e geneiled gant an Normaned p'edo o tistagañ *Sursum corda*, "Savomp hor c'halonoù", e-kreiz an oferenn santel.

- E Breizh, **sant Salaun III**, niz da Nevenoe, roue Breizh war-lerc'h drouklazh e genderv Erispoe. War-dro 860, pa voe c'hoazh gourdrouzet Breizh gant argadennoù ar Vikinged, e savas un abati evit reiñ repu da venec'h Redon pelloc'h en douaroù, nepell diouzh Plelann-Veur, e Skirioù-Masen hag ivez abati nevez Sant-Salver Plelann-Veur. Klask a reas gounit dizalc'hiezh kravezel Breizh e-keñver sez Teurng o c'houlenn digant ar Pab e vefe lakaat Dol da benneskobiezh Breizh. E 874 e voe drouklazhet gant dialerion Erispoe, moarvat er Merzher Gwened hiziv war barrez Lanwelan.

- **Sant Gwigo**n (Gl. Wigon pe Guignon), mab ar roue Salaün III. Hemañ a lezas e dron gantañ hogen lazhet e voe Gwigo gant Paskwiten e 874.

- Bepred e Breizh, **santez Bizher**, mamm a diegezh, patromez parrez an Treoù-Leon.

- En hanternoz enezenn Vreizh, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Moluan** pe **Molvan** pe **Luan**, abad. Mab un uheliad brezhon pe gouezelek, e voe stummet war ar vuhez manac'h gant sant Brendan e Bangor en Iwerzhon. Sevel a reas manati enez Lios Mór ha manatioù all e-leizh hag e varvas e Rossmarkie.

## D'ar 26 a viz Mezheven

- Er IV<sup>re</sup> kantved, e Roma, merzherenti **ar sant Yann ha Paol** a vez meneget e kanon roman an oferenn. Ur brientiliz a zo gouestlet dezho war an dorgenn Caelius. Hervez an hengoun e oa Yann melestrour Konstañsia, merc'h Constantin, ha Paol, e vreur, mestr he servijerion. Dilezel a rejont o c'hargoù el lez pa bignas Juluan an Dianzavour war ar gador-veur. Hemañ, goude bezañ klasket en aner o lakaat da zistreiñ, a zivizas o lakaat da vezañ dibennet dre guzh en e liorz e evit mirout ouzh un emsavadeg hag a embannas e oant bet harluet.

- Bepred er IV<sup>re</sup> kantved, merzherenti **santez Pezhen** (Lt. Pecina, Pisenna ; Gl. : Pitère, Piterre, Pithère, Pexine pe Pazanne), gwerc'hez. Da vare heskinadeg Diocletianus he dije tec'het eus Bro-Spagn ha bevet gant santez Macrina hag he c'hoar santez Colomba e-kichen Neorozon (Niort) ha da c'houde e Magné e bro-bPiktavia lec'h ma voent merzheriet.

- War-dro 507, **sant Agapid** (Lt. Agapitus, Bagapitus ; Gl. Agapit ), abad Sant-Hiler Piktavia goude sant Teomast. Badeziñ a reas sant Masen. Diazezañ a reas un abati e koadeg Vauclair deuet da vezañ abati Sant-Maksen.

- E 515, **sant Masen pe Maksen** (Gl Maixent), abad Agd e bro-bPiktavia.

---

<sup>1</sup> Daoust ma'z eo merket e ouel d'ar 24 e vo lidet d'ar 25 abalamour da ouel Ginivelezh sant Yann-Vadezour.

Ganet en Agd e Bro-ar-Yezh-Og e voe diskibl sant Sever hag ez eas betek ar manati renet gant sant Agapit a gemeras diwezhatoc'h e anv. E Breizh en deus roet e anv da barrez Skirioù-Masen (Maxent) e Bro-Sant-Maloù, lec'h ma voe degaset e relegoù war intrudu ar roue sant Salaün III.

- War-dro 677, **sant Babolen** (Lt Babolenus, Gl. Babolein), abad, manac'h e Luxovium da vare sant Koulman.

Bez' e voe abad kentañ abati «Saint-Pierre-du-Fossé» a zeuas da vezañ «Saint-Maur-des-Fossés» nepell diouzh Pariz. Gant skoazell sant Fursa hag eskibion Pariz Audebet ha Landry e savas meur a iliz hag a ospital.

- E 1975 e Roma, distro da Zoue ene **sant Josémaria Escriva de Balaguer**, beleg spagnolat diazezour an Opus Dei ha Kevredigezh beleion ar Groaz Santel gant ar pal da herouezañ ar santelezh pep hini hervez e stad vuhez.

- E Breizh, er VII<sup>vet</sup> kantved, **sant Maeldreg**, eskob Gwened.

- E Breizh c'hoazh, e 1177, **sant Ruod pe Rozaot** (Lt. Rotaldus, Gl. Rouaud), eskob Gwened. Hag eñ kisterkiad eus Citeaux, e teuas da Vreizh en abati nevez Bear e Bro-Dreger ha diwezhatoc'h e voe kentañ abad Lanvaos e Bro-Wened e 1138 ha da c'houde eskob e 1143.

- E 1668, **an Tad Visant Meur**, beleg breizhat, diazezour Kloerdi ar misionoù diavaez e Pariz. Genidik eus Tonkedeg e Bro-Dreger, e voe un den a bedenn, un doueonour desket bras hag ur speredelour gwirion. Prezeget en deus ur mision gant an Tad Maner e Tonkedeg hag e c'hoarvezas meur a vurzud en e gerz.

- E 1794, e Camarac (Cambrai) e Bro-gKambresis e-doug an Dispac'h, merzherenti **ar wenvidigez Mari-Tereza Fantou**, leanez eus Breuriezh Leanezed ar Garitez, genidik eus Minieg-Morvan e Bro-Zol, a voe dibennet gant teir leanez all.

- En Iwerzhon, er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Laezhan** (Iw. Lachtán), den a bedenn.

- Er VIII<sup>vet</sup> kantved, **sant Korbikan**, penitiour iwerzhonat er Broioù-Izel.

## **D'ar 27 a viz Mezheven**

- Er I<sup>añ</sup> kantved, **santez Yoanna ar Viroforez pe berlouzaouerez**, gwreg Kouza, melestrour Herod. Gant maouezed all e roe skoazell da Jezuz ha d'e ziskibled diwar he danvez (kv. Lk 8,3). Da veure Pask, ez eas gant Mari Madalen ha Mari mamm Jakez da valzamiñ korf an Arloz hogen e kavjont ar maen ruilhet a-gostez hag ez ejont da gemenn ar c'heloù d'an Ebestel.

- E 444, **sant Kirill**, eskob Aleksandria, doazhour an Iliz.

Dre e gelennadurezh asur e teuas a-benn da lakaat ar wirionez katolik da drec'hiñ e senez Ekumenek Efezos er bloaz 431, a gondaonas Nestorius, a embannas unvaniezh an hinienn er C'hrist hag a roas d'ar Werc'hez Vari an anv a *dTheotokos* eleze "Mamm Doue".

- **Kounidigezh Itron-Varia-ar-Skoazell-Trebad**: Dindan an anvadur klodus a *Imago Beatae Mariae Virginis miraculis illustris* e keheler e Roma ur skeudenn vizantat eus ar Werc'hez Vari eus an XIII<sup>vet</sup> pe XIV<sup>vet</sup> kantved, homañ eus stumm ar re anvet *Strastnaya* eleze "gant binvioù ar Diouzañ". Brudet eo bet dre ar bed a-bezh gant urzh ar Redemptoristed.

- Er VI<sup>vet</sup> kantved, **sant Yann ar Vouster**, Breizhad, penitiour-beleg e-kichen Chinon.

Ganet e Breizh - "*natione britto*" hervez Gregor Teurng, e savas ur peniti gant un nevedan dirak iliz Chinon, moarvat an hini bet savet gant sant Brizh warlerc'hier sant Varzhin. Ober a rae war dro ul liorzh tro-dro d'e beniti lec'h ma studie ar Skritur Sakr ha ma plede gant ar glañvourion a zeue davetañ. Eno e tegemeras santez Radepond deuet da zeskiñ digantañ doareoù ar vuhez penitiour.

- E Kembre, **santez Gwennvrewi**, gwerc'hez ha merzherez.

- En Iwerzhon, **sant Dioman**, manac'h.



*Obidoù sant Mewen*